



shrid

21

taolenn

21

<u>Y. L. DEY</u>	BARZHONEGOU	P. 3
<u>R. HEMON</u>	DANEVELL	P. 13
<u>P. DENEZ</u>	KANAOUENN EVIT YANN JAOUEN	P. 18
<u>Y. DREZEN</u>	ISTORIOU	P. 20
<u>J. M. SYNGE</u>	PA VO AET AL LOAR DA GUZH	P. 33
<u>Y. E. JARL</u>	TARZH AN NOZ	P. 52
<u>O. ar MOGN</u>	UN ISTOR SIMPL	P. 54

SKRJD

KELAOUENN DISKLERIET HERVEZ LEZENN.
PEVARE TRIMIZIAD 1979.
MOULET E ROAZHON.
TI-MOULEREZH PREVEZ.
MEROUR : PER DENEZ.

Y.L. DEY

EVIDOC'H

Bez' ez eus tud a sav kestell
Ha re all n'ouzont ket tevel
O brasañ plijadur eo
Lakaat en arigrap
Korzailhennoù bev, tomm o mouezhioù
Enno komzoù mouget ha dastumet
Aze, e karnell ar re vut
Evit peseurt abeg,
Den ne oar dres
Mes den ne ra taol gwenn
Evit teñzorioù da guzhat
Ouzh daoulagad an amzer o vont e-biou
Dec'h n'eus ket mui anezhañ
Ha warc'hoazh eo bremañ
Mar fell dit asantiñ d'an dra-mañ
Ha c'hwi, tud kamm ho teod
- Gant piv ? -
Petra 'soñj deoc'h
Eus c'hwitadenn splann
Un arnod a frankiz triliv
Evit daou wenneg ouzhpenn
Ha lizherenneg an estren
Me ho ped
Ra chomo blaz ar frouezh diaz
Ganeoc'h
Evit ar vugale ma 'z omp
War douaroù ar C'hornog...

A-RAOK MONT KUIT...

Heol dour war al loc'h
Trouzig sklentin ar roeñvoù mibin
A ya da get tamm-ha-tamm
War eon eoulek an houll
Deuet habask souden.
Hag ar sterenn vouk ' zo kouezhet
War koadegi gwerni
Astennet trema an noz...
Beaj diwezhañ-holl al laboused
Etrezek aodoù kuzhet ouzh selloù ar c'heinvor...
Tud ar vro-mañ n'o deus soñj ken
Eus krenijenn ar geot er wenodenn
Ne c'hortozont ket ar vag-noz ken ;
Ken hir eo an hent evelato
Etre glannoù ar Vuhez hag ar Marv
Hag ar vag-mañ a gas an dremenidi diank
A-dal da stered all,
Stlepel a ra an avel outo dornadoù traezh
Hag holen ar c'herreg.
Er c'henwallerezh iskis-se
E kemer perzh an noz
E-kreiz kinnig da gann al loar
Ar galloud reizh da sklerijennañ an Douar
Ha da lakaat ar paour-kaezh foeter-bro ma 'z on
Da bartial war-đu ur gouloù-deiz nevez...

T... K

Tik, tak
Takenn dour
Tak, tik,
War un tog-touseg,
Tik, tik,
Lamm an eostig
War tog an touseg,
Tek, tek, tavedek,
A ra tok, tok,
Emañ o klask an tag,
Eme an touseg
Deuet trumm teodek,
D'e vignon ar pudask gak.

PREZEGENN AN HINI FOLL

Harpañ a ran va c'hein ouzh glaster an oabl
Evit sellout ouzhit ac'han, un tamm brav pelloc'h
Eget m'em befe soñjet, d'az kwelout
E-touez an holl re a gerzh evelout
Evel mekanikoù sioulaet war-bouez
Skingasadennoù e yezh ar vezh
Arouez da sotoni ;
Ma soñj dit ez out disheñvel
Diouzh ar re all dre ma komzez
Gerioù stlapet ouzh begoù ar c'herreg,
Ne gredan ket mui en istor-mañ,
Azezañ a ran hepken
A-raok plegañ pe er c'hlañvdi
E-mesk ar re foll
Pe'n em veuziñ er ganol
War ribl ar ganienn-se
Emaon o c'hortoz ma tostay linenn an dremmwel
Betek ennout, dit da welout
An dazont a zo bet prometet dimp
Peogwir eo bet studiet, prientet ha kaset war-raok
Hepdomp, evidomp
Lamponed ma 'z omp !
Arabat en em douellañ
Ne dalv netra da douellañ
Teil ar soñjoù gweñvet, koeñvet
Gant ur c'hleñved
N'hor bo biken kalon a-walc'h
Da zistagañ e anv dezhañ :
Petra a soñj deoc'h eus...
Kriñ-bev ar speredoù ?
O, gouzout a ran ervat

Perak komz eus un droug
Na c'hell ket bezañ pareet gant ar vezeien.
Nag ur c'hleñved didrouz
O widilañ tamm-ha-tamm em spered
O'n em silañ takenn-ha-takenn
Evel ur gwent-red.
Kent sodiñ da vat
Ha mervel evel ul loen
E fell din debriñ adarre, unan-hag-unan,
Predoùigoù an amzer o tremen
Evit lazhañ dec'h, hiziv ha warc'hoazh
Douarañ ar garmoù, ar gustumañs hag ar spi
Ha saouriñ bremañ a-rak diouzhtu !

A ZEIZ DA ZEIZ

A zeiz da zeiz
An holl heolioù 'gouezh
A-drek ur stign nevez

A zeiz da zeiz
Gwelout a rez
Ar memes c'hwez
A veuz da weuz

A zeiz da zeiz
En digenvez
Ur sonerezh
A son a-nerzh

A zeiz da zeiz
Ur bobl a-bezh
A goll he mezh
A gomz he Yezh

A zeiz da zeiz
A drec'h da drec'h
Ne vo ket mui e Breizh
Tud a neblec'h...



Er vered kozh, e Brest, obidoù Roparz Hemon : Yann
Desbordes o lenn ar varzhoneg Kanenn Vrezel
(sk. Yann Gailhareg)

R. HEMON

An dud a zo en em vodet evit an interamant dirak an ti e traoñ ar Ru Vras. Ne oa ket kalz anezho. Bez' e oa karr-kañv ar beorien, pe dost. An arched a zo deut er-maez dre an trepas. Lakaet eo bet da risklañ e-barzh ar c'harr. Un arched koad-sapr.

An tad a zo deut er-maez, en e zilhad bemdez, gant ur vrec'henn lien-fulh. Ar c'hoar a zo deut er-maez, gwisket e du, ur ouel lien-fulh war he dremm.

Bez' e oa ivez ur bagad skolidi eus Skol ar Verdea-durezh, gant o sabrinier ha manegoù gwenn. Daou ofiser a oa ganto.

An dud o deus kerzhet war-lerc'h : perc'henn an davarn ma laboure ar c'hoar enni. N'oa gwaz ebet neme-tañ. Neuze ar merc'hed : perc'hennez an davarn, div eus ar mitizhien, poultrennet o beg, frizet o blev ; an amezegez a oa he c'hamb war ar pondalez, hag ar gannerez.

Pignat a rejont gant ar Ru Vras, tri beleg hag ur c'holist dirazo, etrezek iliz Sant Loeiz. Izel oa an oabl. Glav a oa enni.

- "Demat, Itron," eme an amezegez.

- "Demat, Itron," eme ar gannerez.

- "Kemeret hoc'h eus ho tisglavier. Ret e vije bet din kemer va hini."

- "Ne ray ket a c'hlav marteze."

- "Gant na ray ket."

- "Anaout a raec'h anezhañ ?"

- "Nebeut."

- "Anavezet em eus ar vamm. Ur vaouez vat anezhi. N'eo ket bet eürus gant he gwaz ha gant he merc'h. Ne veve nemet evit he mab. A drugarez Doue eo marv. Ur paotr mat a oa anezhañ."

- "Krediñ a rafen."

- "Perak ivez klask ober un aotrou eus he bugel ?"

- "Speredek oa ar paotr, war a lavarer."

- "Speredek, me 'lavar deoc'h ! Atav ar c'hentañ er skol. Abalamour da se eo deut ar vamm da vezañ fougeüs gantañ. Fellout a rae dezhi ez aje da Skol ar Verdeadurezh. Mat ! Echu eo bremañ."

- "Ur gwall zarvoud eo, n'eo ket 'ta ?"

- "Ur gwall zarvoud !"

An ambroug-kañv a zo degouezhet dirak an iliz. Ne badas ket pell. Perc'henn an davarn n'eo ket aet e-barzh. Aet eo da evañ ur banne e-tal ar c'hoc'hu. Ar berc'hennez, kroaziet war he barlenn he daouarn goloet-holl a walennoù a zo manet kousket. An div vatezh n'o deus graet nemet sellout a bep tu, an eil o vountañ eben gant hec'h ilin en ur c'hoapaat. An tad a zo chomet azezet an holl amzer, e gasketenn etre e vizied. Ar c'hoar a zo chomet en he sav hep fiñval dirak he c'hador. An amezegez he deus lavaret he chapeled. Ar gannerez he deus heuliet an ofis.

Setu i er-maez. Pignat a reont etrezek ar vered.

- "A drugarez Doue ne ra ket a c'hlav," eme an amezegez.

Bremañ e kerzh e-kichen ar gannerez adarre, an div vaouez dereat n'eus nemeto, war o menoz.

- "Nann, a drugarez Doue," eme ar gannerez. "Ur gwall zarvoud, a gav deoc'h !"

- "Se zo bet lakaet war ar c'hazetennoù."

- "Ur gwall zarvoud mar kirit. Ne lavaran ket n'eo ket bet beuzet."

Stouñf a ra war-du an amezegez. Hiboudiñ a ra e pleg he skouarn :

- "War a gredan, en em lazhañ en deus graet."

An amezegez a hej he fenn.

- "Va c'henderv a zo kartier-mestr e Skol ar Verdeadurezh. Kontet en deus an traoù deomp."

Daou eus ar veleien a ziskenn ar Ru Vras. Emeur war blasenn an Dorojoù. Ne van nemet ur beleg gant ar c'holist.

- "Abalamour dezhi eo."

- "Abalamour da biv ?"

- "Dezhi, e c'hoar."

- "Ur c'hast eo hounnezh."

- "Chomit peoc'h 'ta. An holl dud a oar petra eo an davarn-se. Ne lavare ket d'e gamaladed piv oa e gerent, hervez."

- "N'eo ket souezh."

- "Lorc'hus e oa. Pa ziskenne war zouar..."

- "War zouar !"

- "E-giz-se e vez lavaret er Skol, daoust m'emaint

war zouar dija, peogwir emaint e Laninon. Diskenn war zouar, se a zo dont e kêr. Pa zeue war zouar, morse ne dae d'e di. Mont a rae en un ti a veze feurmet ganto, un toulladig anezho, er Ru Foix. Lavarout a rae d'ar re all e oa e gerent o chom e Pariz. C'hwi 'oar penaos eo an dud yaouank : bez' e oa paotred eus ar Skol o taremprediñ tavarn ar c'hoar."

- "N'eo ket posupl ! Difennet eo dezho."

- "O, kuzhet-mat eo an davarn-se, en un tu bennak a-dreñv Kerabekam. Bez' e oa paotred eus ar Skol o taremprediñ tavarn ar c'hoar, hag o taremprediñ ar c'hoar ivez. Hag hi ur wech da gontañ he doa ur breur er Skol."

- "Penaos eur deut da c'houzout an dra-se ?"

- "Gouezet e vez pep tra, c'hwi 'oar. Kontet he deus dezho he doa ur breur er Skol. I ne felle ket dezho krediñ. Neuze he deus roet e anv ha tout."

- "Pebezh pezh fall !"

- "Chomit peoc'h 'ta ! Ha roet he deus he foto da unan anezho war ar marc'had."

- "E foto dezhañ ?"

- "He foto dezhi. An hini he deus roet he foto dezhañ, war a lavar va c'henderv, a zo ur pikol paotr treut a vez atav o klask tabut. Se a zo c'hoarvezet ur sulvezh d'abardaez. Moarvat o doa holl evet ur banne re. An tabut a zo kroget er c'harr a gase anezho da Laninon. An hini treut ha re all ne raent nemet ober goap eus ar paour kaezh paotrig. A bep seurt a lavarent, ha ne ouie ket perak."

- "Fall eo an dud yaouank memestra."

- "Diskennet int eus ar c'harr. En un trepas e oa. Meur a drepas a zo er Skol-se. O gwelet em eus pa 'z on aet gant va c'henderv un devezh gouel. Ar re-se

a zo brav er Skol, c'hwi 'oar, e kembroù hag a sell ouzh ar mor. N'o deus ket da glemm a dra sur. Mat ! An hini treut en un trepas a lak foto e c'hoar dindan e fri. N'oa ket ur foto eus an dereatañ ouzhpenn."

- "Ar foet a rofen-me d'an holl verc'hed-se. Pa 'z eus reuz eo abalamour dezho atav."

- "Petra en deus graet ar paotrig neuze : lakaat e zorn dres e beg an hini treut. Hag an hini treut da fatañ, e benn leun-wad, hag ar re all da zont tro-war-dro, hag ur martolod da vont da glask an ofiser a oa e servij."

- "Se oa graet mat d'an hini treut."

- "Va c'henderv en deus klevet darn eus ar pezh a zo bet kontet pa'zeobet galvet an daou baotr gant an eil komandant en devezh war-lerc'h. Ar paotrig en deus lavaret an traoù rik evel ma oant. Ha c'hoazh e tifenne e c'hoar."

- "Evit ur paotr mat e oa ur paotr mat a dra sur."

- "Kastizet int bet o-daou. Ar paotrig a oa notennet-mat. Morse n'en doa bet kastiz ebet a-raok. Diwar an deis-se n'en deus mui komzet gant nikun ha n'eo mui aet e kêr da bourmen. C'hwi 'oar ez eo kouezhet eus ar vag ur wech ma oant oc'h ober un dro war ar mor."

- "Hervez e dad e ouie neuial mat-tre."

- "Kaer a vo lavarout, krediñ a ran en deus en em veuzet a-ratozh."

- "Takennoù glav a gouezh, a lavarfed."

- "Deuit dindan va disglavier. Arabat eo mont er-maez hep disglavier gant an amzer-se."

(Skrid diembann)

Per DENEZ

KANAOUENN EVIT YANN JAOUEN

Te zo bet da unan en eur ma varv pep spi
Hep gallout pegiñ e brec'h den, hep gallout stardañ
dorn ebet,

Te zo bet da-unan dreist an treuzoù,
O lezel war da lerc'h ar stourm enep d'ar vizer,
Enep d'an direizh, enep d'ar baourentez.

Peseurt skeudenn zo bet en da zoualagad
A-raok na vent klozet da viken ?
Skeudenn maezioù da vro,
Dremm da vamm,
Skeudennoù an emgann, e skeud ar gwenn-ha-du, gant ar
vignoned

A oa ganit, a oas ganto
Breizh ?

Peseurt komz ac'h eus klevet a-raok na teufe mut ar bed
en-dro dit ?

Ha lavaret zo bet dit
E oa arabat kaout aon,
E oa arabat digalonekaat,
E oa sur ar stourm da vont war-raok,
E oa sur ar bed da vezañ,
Un deiz,
Evel az poa c'hoant e vefe ?

Ha dorn ur vamm zo bet war da dal,
Ha dorn ur plac'h war da jod,
Ha dorn ur paotr zo bet war da zorn ?
Ha klevet ac'h eus,

A-raok mont ,
Ur vouezh o lavarout, ouzh da skouarn,
Da anv ?
Poan hon eus bet
Pa 'z out aet kuit ken abred,
Poan hon devo atav
O soñjal ennout,
O soñjal er yaouankiz aet kuit,
El labour kollet,
En nerzh distrujet
O soñjal ne vi ket ganeomp
E deiz an trec'h.

Derc'hel a raimp gant ar stourm avat.
Lakaat a raimp hor meilh-dorn war fas an enebourien.
En em gannañ raimp evit ar re baour,
Evit ar re wan,
Evit ar re a vez gwallgaset,
Dismegañset,
Disoñjet
Evit ar re a zo bet da re.
En em gannañ raimp evit ar menoz
A zo bet da hini,
Evit ar justis
Ac'h eus bet c'hoant dezhi,
Evit an devezhioù sklaer
Ac'h eus gwelet o tont.

Ha te oar, Yann,
N'eo ket hepken e kalon ur vamm e vevi c'hoazh,
Met ivez en eñvor, hag e lagad, hag e kalon
Ar re a zo bet amañ o stourm ganit -
Em eñvor, Yann,
Em c'halon
Hag em stourm.

- Embannet evit ar wech kentañ e SKRID 1, 1974 -

C'HWEZ AR GOUEZ

Matao Kerino, baraer e kêr-Wened, a zo outañ un diael a fogaser.

Evel just, n'en deus ket e bar evel chaseour. Gedon, konikled, klujiri, kefeleged, driski, goelini, brini, pennoù-ruz, houldi gouez, pluñv pe vlev, ne chom hini war e lerc'h. Emezañ.

Hogen, gouzout a ra ivez an holl eo berrwel Matao. Tennañ ra evel don, da lavarout eo fall-du. N'eus den, ouzhpenn, ha ne oufe e vez lazhet (?) gantañ e jiboes, lakaomp... e stal ar c'higer-moc'h pe, c'hoazh, gant ar bigrier.

Na petra 'vat ? Graet e vez van d'e grediñ...

Dilun da noz, e tegouezhe en ostaleri "Skeudenn Santez Anna", war marc'had al loened. Edo azezet ouzh un daolig, goullo e sac'h war e gein, ur chaseour all, Sulian Dalido, marc'hadour glaou.

- Salud, Sulian. Mat ar pernod ?

- Salud, Matao. Diskenn a ra war-lerc'h seurt galoupadenn.

- Chase 'z eus bet, Sulian ?

- Kaoc'h-ki, ya ! Ha te, Matao ?

- O, me ! Treut ! ... an tammig gad-mañ, netra ken. Hag e taole ar C'herino war an daol ur pezh

mell gad lart-toaz.

Sellout a reas Dalido ouzh preizh egile gant avi hag estlamm. Neuze, o vont d'ar c'had, e tigoras he malvennoù gant e zaou viz, dre m'he c'hwese flour ha goustad. A-benn ur reuziad, e troe ouzh Matao Kerino. Ur prenn en doa graet d'e vourenn, hag hejañ 'rae e benn :

- Ma, paotr ! emezañ, homañ oa poent bras dit he lazhañ.

(Sav, nv. 10, nevez-amzer 1938)

AR BILHED MIL LUR

"Va breudeur ha va c'hoarezed kristen, a lavare ar c'hure ar sulvezh-se, er gador-brezeg, bennigomp an Aotrou Doue da vezañ skuilhet puilh e vennozh, ar bloaz-mañ, war barrez Plougastel, rak priz mat a zo bet war ar sivi, hag ivez war ar piz bihan.

"Ret eo deomp anzav, siwazh, n'eo ket brokus ar profoù, betek-hen, e-keñver ar c'hounidigezh. Lavaret eo bet deoc'h, koulskoude, emañ ho peleien o sammañ mizoù pounner evit paeañ un doenn nevez da chapel Langristin... Ur vevh e vefe d'ar barrez lezel toenn chapel Langristin er stad divalav m'emañ.

"Moarvat e klevot va galv, hag e teuiot war sikour ar presbital. Da bep hini da reiñ e skoazell deomp gant e wenneien, kalz pe nebeut, hervez e yalc'h. Tremen a rin, me va-unan, goude ar brezegenn, gant ar plad, en ho touez ; kerkent ha bremañ, e lavaran deoc'h, va breudeur ha va c'hoarezed kristen : Bennozh Doue deoc'h evit hoc'h aluzen : Doue r'ho paeo."

Hag e reas ar c'hure bras tro ar c'hadorioù, oc'h hejañ plad ar gest, a-hed e vrec'h gwisket gant ar surpiliz gwenn ledan, dindan fri ar barrezianiz. Hag e taolas pep hini e skod, bihan pe vras, e plad ar gest.

Er sekreteri, avat, e reas an aotrou kure ur pezh

lamm, pa gontas e wenneien. Pezhioù dek lur, re ugent lur a oa er plad, forzh pegement, kement-se n'eo ket souezh, rak derc'hel a ra Plougastell d'e vrud a barrez vat, ar vrokusañ hini marteze, e-touez holl barrezioù Kerne ha Leon. N'eo ket zoken gant an hanter-dousennbilhedoù hanter-kant lur a zastumas ivez, e oa sabatuet.

Hogen, pleget ez-aketus, hag evel mezekaet gant e dalvoudegezh, ha nevez-flamm ouzhpenn, ur bilhed mil lur en em guzhe etre plegoù ur bilhed dek lur. Mil lur ! Ne vezont ket kavet e goudelloù goulo. Ha kaer a zo kredif eo Plougastelliz kristenien eus an dibab !... un estlamm a oa kavout ur bilhad mil lur e plad ar gest !

Yann-Glaoda Kervella, avat, eus an Tinduff, a-hont, war aod ar mor, en doa bet a-walc'h o sakreal hag o pec'hiñ hag o jarneal, ar sulvezh-se. Hag o kaout nec'hamant ivez.

Troet ha distroet en doa e holl c'hodelloù ouzhpenn kant gwech, addigoret hag adfurchet e zoug-bilhadoù ler, pignet ha diskennet, dre deir gwech, an hent etre Tinduff, war aod ar mor, hag ar vourc'h uhel a-hont war an dosenn, o sellout pizh er fozioù hag e strouezh ar c'hleuzioù, turlutet en ostalerioù, goulennataet ki ha kazh. En aner. Kollet en doa e vilhed mil lur, n'ouie tripledie mod ebet pelec'h.

Pa voe graet ali dezhañ lakaat hopal un embann gant an tabouliner, en doa respontet gant imor :

- Koll pevar real ouzhpenn, setu petra a c'hounnez-fen...

D'ar sul war-lerc'h, d'an oferenn-bred, e savas adarre, daoust ma n'oa ket e dro, ar c'hure bras er gador-brezeg. Ha raktal goude ar bedenn-sul hag heñ da reiñ trugarezioù kalonek da barrezianiz Plougastel ha d'o fedif da genderc'hel d'en em ziskouez ker brokus, ken na vije paet toenn nevez chapel Langristin...

... "Ha koulskoude, emezañ, ret eo din anzav am eus bet ur gaer a souezhenn, disul diwezhañ, o kontañ ho profoù, va breudeur ha va c'hoarezed kristen. Ya, ne nac'h an ket, daoust ma anavez an ho kalon vat ha tommder ho feiz kristen, souezhet on bet o kavout e plad ar gest ur bilhed-a-vil-lur !" -Sklaer ha fraez e tistagas ar beleg ar c'homzennoù.- "Ha lavaret em eus dre va soñj e oa bet lakaet marteze dre fazi, e plad ar gest, hag e vije marteze, ar bilhed-se-a-vil-lur" -sklaer ha fraez e tistagas adarre ar c'homzennoù,- ... "un diouer kriz d'e berc'henn reuzeudik, dre ma n'en doa marteze nemet ar bilhed-se a-vil-lur war e anv, rak n'eo ket roet d'an holl, siwazh, bezañ fortuniet.

"A-raok, eta, lavarout ur bennozh-Doue ispisial d'ar profer dianav, ker brokus e galon, e karfen bezañ sur n'eo ket kouezhet ar bilhed-se-a-vil-lur..." -sklaer ha frae evel uheloc'h,- "dre fazi e-barzh ar plad. Emañ atav er sekreteri, o c'hortoz e berc'henn reuzeudik. Rentet e vo dezhañ ma 'z eus bet fazi. Ac'hanta, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, piv en deus taolet er plad, evit toenn nevez chapel Langristin, ar bilhed-se-a-vil-lur a zo bet kavet ganin disul diwezhañ ?"

Yann-Glaoda Kervella en doa tennet hir war e anal.

Sevel a reas trumm en e sav ma voe darbet d'e gador kouezhañ war daoulin Job ar Gall, eus korn

hent an Treiz. Ha teurel a reas herr :

- "Me an hini eo. Ha graet em eus espres !"

(embannet war SAV niv.26
Goañv 1943)

AR FOUT-BALL KAPOUCHOU

'Lec'h mont d'ar skol, Ivoñ Berr, eus Traoñ Pont Gwern, e Pont-'n-Abad, a oa chomet, gant frioù-karn eus e oad, da c'hoari polotenn e porzh ar Jentrig, e Penn-ar-C'hap.

Stlapet e voe re rust ar bolotenn gant Ivoñ. Ma 'z eas da skeiñ ouzh prenestr ti Lij ar Virgoudig. Ha torret ur werenn. Ne vije bet nemet hanter-droug, pe tamm droug zoken evit hor frioù-lor, panevet en em gavas un test : Lij ar Virgoudig, hec'h unan, o tis-kornañ, dres d'an ampoent, dre ar vanell gant ur sailhad dour.

- I che, lavagnoned !...

Ha Lij war eeun da Draoñ Pont Gwern, da di mamm Ivoñ, Soaz Korantin Paoioù Radenn. Homañ 'oa o peur-echuiñ skotañ traoù merenn.

- Lârit 'ta, Paoioù Radenn ! Ho mab 'n deus torret va gwer du-mañ gant e fout-ball kapouchou !

- Pér rin dein ? Lao neiñ ? Me na ve kaset d'ar prizon ! (Petra 'rin dezhañ ? Lazhañ anezhañ ? Me a vo kaset d'ar prizon !)

(Embannet war SAV, niv 26, Goañv 1943)

BEVAN

Ur vigoudenn gozh, kramennet ha roufennet he dremm, ha kruk et he c'hein, ken na oa, a oa azezet, o tomm-heoliañ, hec'h-unanig, harpet war he bazh, e traoñ diri mein ar groaz a zo savet e penn an hent geot a gas da zismantroù maner Lestiala, e Plomeur.

Hag e c'hoarzhe outi hec'h-unan. Hag e c'hoarzhe, siwazh dezhi, a galon vat, ken na vere an dour diouzh he daoulagad :

- 'Ve, moereb ! Me lavar e c'hoarzhe kalonek.

- Ya ! Va faotr bihan ! Gant ar joa da vezañ bev !

(embannet war SAV, niv 10, Nevez-amzer 1938)

PILHAOUER TOULL-AR-SARPANT

Anton Jezekel a oa bet darbet dezhañ, o vont e-biou da Doull-ar-Sarpant, kaout e gorfad strafuilh.

Anaout a rit ar pezh tachennad douaroù-pri-se, ne gaver warno, dre hed ha lec'hed, nemet dour-chag, broen, ha toulloù e-leizh skoachet diindan geodachoù divat, ar yeun, en ur ger berr, a 'n em astenn etre bourkoù Gwipavaz ha Goueznou, en daou du d'an hent bras.

War-dro rouz an noz e oa. Edo Anton Jezekel o vont da dreuzañ ar pont bihan. Eno, war a lavared, e veze gwelet traoù. Ha klevet ivez, moarvat. Rak, setu tao-lioù skourjez o strakal, ha youc'hadennoù ha sakreoù o tarzhañ, peadra da lakaat ar c'hwezenn yen da c'hle-biañ deoc'h ho roched war ho kein. Ha "Tri mil mal-lozh va Doue !" amañ, ha "Ha me droc'ho e tammoù, mab gast lorgnez koatet ar bordilli !" ha "Kerniel diaoul ar youdig hag e gi du daonet !" war ar marc'had. Ur Sabbad !

Ar Jezekel a oa outañ ur pikol den, paket mat, ha krapet start ouzh an douar. Hejañ 'reas e skrija-denn gentañ, ha sellout a reas er yeun diwar gorre ar pont bihan. A-hont, war e zorn dehou war-du Goueznou, e welas ur c'harr dianket diwar ar wenojenn strizh, ha sanket unan eus e rodoù betek e ahell en ur poull-fank.

Tostaat a reas Anton Jezekel.

- Hu ! bailh ! a hope ar charretour, dre ma sache war benn e varc'h. Al loen a oa anezhañ ur bided Kerne, sec'h ha bev e-giz e vestr. Sachañ rae en-dra ma c'helle. Nemet re zon e oa aet ar rod el lagenn. Ne fivfe ket ar c'harr. Traskal, ne lavaran ket.

Ar c'harr a oa leun-tenn : pilhoù ennañ, dastumet e kêrioù ar maez a-hed an hentoù, ha lien, danvez linselioù da werzhañ pe da reiñ e trok, hervez mod ar bilhaouerien ; rak ar charretour a oa ur pilhaouer a Lokevred, Brenniliz pe ar Fouilhez, hep ket a var. Ha droug ennañ, m'hel lavar deoc'h. N'eus ket par d'an dud bihan sec'h da vagañ seurt korfadoù imor.

- Va den mat, eme al Leonad, 'm eus aon e vefe dereatoc'h deoc'h, e-lec'h drouk-pediñ, evel ma rit, prometiñ un oferenn d'an Anaon gaezh, pe kinnig ur c'houlaoenn da sant Goueznou binniget, evit tennañ war ho penn skoazell an neñv, d'ho sachañ alese.

- Fidamdoue, marteze paotr ! Pemp kant skoed a roin d'ar sant, mar kirit, ma tenn ac'hanon diouzh seurt toull-ifern.

- Nann, Toull-ar-Sarpant, va den mat !

E-keit-se ar Jezekel e skoaz ouzh lost ar c'harr ; hag ar bided o sachañ reut, ar wazed o vac'hañ pennok, -hioup ! - setu difankigellet ar c'harrad pilhoù.

Etre c'hwezif ha c'hoarzhin, al Leonad ha paotr Kerne a dape o anal en-dro.

- Selaouit, va den mat, a c'houlenne ar Jezekel, a-benn ur pennad.

"Ho karr, ho loen, hag ho marc'hadourezh, lakaet bern war vern, ne dalvezont ket pemp kant skoed. Kavout a ran souezh ho pije kredet prometiñ pemp

kant skoed d'ar sant evit kaout e sikour.

Ober a reas egile un hej d'e skoaz :

- Mil skoed em bije prometet zoken. Tailhet em bije dezhañ.

(embannet war SAV, nv. 15, hañv 1939)

AN INTANVEZ HAG AR VI

Mari-Helena gozh Hello a oa klañv he den war e wele, tremen pemp miz a oa, en tiig gwenn o doa lakaet sevel, e Sarhao, war benn-hent Arhon.

Ur c'hleñved langiz, dianav en hor broioù, ha tapet en Inizi gant Chim Joubiou, he den, en amzer ma oa kabiten war al listri-kenwerzh. Mari-Helena, diouzh he zu, n'oa ket yac'h-yac'h, abalamour d'ur c'hleñved-kalon. Ha, neuze, aet e oa an daou bried war an oad.

War gemenn ar medisi, ar Joubiou a oa ret dezhañ lonkañ bemdeiz ur vi fresk. Uzañ teod e vefe lavarout deoc'h na vije ket bet fiziet gant Mari-Helena gozh en amezeg ebet evit ar gefridi. Mont a rae bemdeiz, hi hec'h-unan, da gerc'hat he vi nevez-dovet, en ur gêrig war ar maez, ur c'hart lev bennak eus bourc'h Sarhao. Ur wall-drotadenn d'he divesker kozh. Nemet, na petra, evit yec'hed he den e oa !

Setu ma chomas klañv d'he zro, un abardaevezh gant he c'halon.

An nozvezh-se, end-eeun, e tremenas ar c'habiten-vor. Ranngalonet an holl, ha nec'het.

- Paour kaezh maouez kozh, penaos e tegemero ar c'helou, hag he c'hleñved-kalon ? Skoet e vo d'he zro gant taol ar marv... a huanade kerent hag amezeien.

- Gortozomp, evit komz, ken na vo gwellaet, siwazh dezhi, eme unan bennak.

- Gortozomp.

Graet e voe war-dro ar glañvourez, evel ma ne vije bet den marv en ti. Pa veze degaset kaoz ar vi fresk, e veze atav un ene evit respont : "n'en em chalit ket, Helena gaezh..."

Pa voe poent kas d'ar vered korf ar c'habiten, e voe sammet kuit an arched, sioul ha didrouz, dre ar prenestr. Ha kuit an interamant, d'an iliz, war vegoù an treid. Hep kloc'h na kan beleien.

Mari-Helena gozh en he c'hambr, a oa muioc'h a dregas en he fenn gant yec'hed he fried eget gant he fallaennig, ha menegiñ a rae ar vi bep ar mare.

Pa voe dam-bare, ha war-nes sevel, e voe ret, koulskoude, diskuilhañ ar wirionez kriz d'an intañvez paour.

Diskuilhet e voe, goustad, gant evezh ha komzennoù gwisket blot. Ha Mari-Helena gozh ha tennañ war hec'h anal :

- "Ma, emezi, an den kaezh, e giz-se ne vo ket dao din mont bemdeiz mui da gerc'hat dezhañ e vi."

(embannet war SAV, niv. 25
Diskar-amzer 1942)

J.M. synge

**PA VO AET
AL LOAR
DA GUZH**

BREZHONEG GANT HERLE DENEZ.

Tud ar pezh-c'hoari

Kolm Sweeny : un den yaouank, pennhêr d'e eontr.
Brid : ur servijourez yaouank.
Seurez Eileen : ur seurez yaouank oc'h ober war-dro
an eontr, kenitervez a-bell da Golm.
Mari Gostello : unan kollet he fenn ganti.

lec'h ar pezh-c'hoari :

*Un ti war ar maez e reter Bro Iwerzhon, e-pad
devezhioù diwezhañ an nevez-hañv, pe neuze e penn
kentañ an hañv, e dibenn ar c'hantved.*

Ul levraoueg-familh en un ti war ar maez. Kalzig
levrioù a zo war an estajerennoù a-hed ar mogerioù.
Un tan taouarc'h o teviñ goustadik en oaled toullet
er voger-gostez : euc'h ar siminal ur pezh poltred.
War an tu dehou an nor vrasañ. Unan all a zo e moger
ar foñs, damguzhet gant ur ridoj, hag a zigor war
an diavaez. E-kichen ar siminal ur prenestrig ; a-
zehou da zor ar foñs ez eus unan all c'hoazh ; o-
div a zo diskennet ar rideozioù warno. Ul lamp bras,
e-kichen an daol, gant un tog kleuzeur mouchet gant
ul lien, o sklerijennañ ar gambr. Dilezet war unan
eus ar c'hadorioù e-kichen an tan, ur pezh skoulm
graet gant ul lienenn gañv. Brid, ur plac'h yaouank,
a zo war he daoulin o fichañ an tan. Eus an tu kleiz
e teu tre Kolm ; gwisket gant ur pezh mantell serret-
kloz ken uhel hag e chink.

KOLM (o sellout en-dro dezhañ) : Aet eo Seurez Eileen
da gousket ?

BRID : N'eo ket, Aotrou. Pennfollet-mik oa gant aon e
vijec'h bet kollet er menezioù. Emañ dres o
paouez diskenn betek penn izelañ ar bradenn
da welout hag-eñ ne vefe ket klevet ur c'harr
war an hent.

KOLM : Dre an tu all on deut, neuze 'vije ket bet tu
dezhi da glevout ac'hanon o tont. (Mont a ra
war-du ar prenestr bras.) Pell 'zo eo aet
kuit ?

BRID : Ur pennadig 'zo hepken.

KOLM : En em c'houlenn a ran hag-eñ ne vefe ket tu
din kavout anezhi...

BRID : 'Vefe ket, Aotrou, ha koulz deoc'h chom amañ

azezet-brav da dommañ ho treid, ken fir ha ken laouen e vo-hi ouzh ho kwelout pa zeuio en-dro, rak ne chomo ket pell dindan ar barr 'zo o tont en tu all d'ar gwez bras.

KOLM : (*o sevel stign ar prenestr*). Spi am eus na gollo ket he hent. Marteze, ma wel eo digor an nor e teuio soñj dezhi dont en-dro war he c'hiz. (*Chom a ra da sellout er-maez*.)

BRID : (*un tamm taeret he mouezh*.) 'Benn nebeut e vo distro pa laran deoc'h, deuit 'ta da gaout un tamm diskuizh. Ezhomm bras ho peus sur-mat ; rak soñjal a rae deomp eo droug an hini a dapoc'h dre forzh mont da gantren hoc'h-unan-penn en noz du dindan ar glav-pil, c'hwi hag a zo boaz da vevañ atav er c'hêrioù bras. (*Degas a ra ur gador e-tal an tan*).

(*Tostaat a ra Kolm ouzh an tan, un tres skuizh warnañ. Kregiñ a ra da lemel e vantell hag e votoù ponner. Tennañ a ra Brid al lienenn-gañv diwar e gador*).

BRID : (*o tiskouez al lienenn-gañv dezhañ*). Ha n'eo ket un tamm brav a skoulm eo deut a-benn da ober gant ar c'hozh tammoù pilhoù hon eus kavet ? Be' on bet o sellout outi, ha be' c'hellan lavarout deoc'h e oa ur gwir sebez.

KOLM : (*gant poell*). Akuit eo gant he daouarn.

BRID : Ha c'hoazh n'en deus ket an Aotrou gwelet penaos eo bet renket ar gambr ganti, gant bleunioù brav, ha goulaouennoù gwenn, ha dilhad kaer war ar gwele, hag ho paour-kaezh eontr gourvezet ken brav, serret e zaoulagad ken sioul ken e vije kredet eo un den kozh oc'h ober ur pennadig kousked. (*Treiñ a ra war-du an tan o leuskel un huanadenn*). A, pell e rankfe unan evit kavout ur plac'h koulz ha

Seurez Eileen, ha gwall zigenvez an hini en em gavo an Aotrou warc'hoazh, pa vo aet Seurez Eileen en-dro d'ar gêr vras.

KOLM : Keit ha na vo ket bet lakaet ma eontr en douar e chomo hi amañ.

BRID : Ha ma padan goulenn, peseurt devezh e vo an interamant ?

KOLM : 'Benn digwener e vo. Ha c'hoazh n'eo ket bet aes din lakaat anezhañ digwener, kement a draoù 'oa da renkañ.

BRID : Ur gwall abadenn e vez evit an dud pinvidik pa varv unan bennak er familh, ha zoken mar deo un den kozh, ha gouzout mat a raen e vijec'h bet dalc'het e kêr an endervezh-pad gant an istor-se.

KOLM : Pellik a-walc'h on bet dalc'het, met pa oan o tistreiñ 'm eus faziet war va hent, ken em eus treuzet an taouarc'heg, tre betek bered Glan-na-nee.

BRID : Ma Doue benniget ! Met ne vez morse den ebet o tremen dre aze, nemet ar re a vez o tennañ taouarc'h. Ur gwir burzhud eo sur p'eo deut en-dro an Aotrou hep kaout droug ebet ha n'eo ket bet kollet er menezioù.

KOLM : Ne ouien ket gwall-vat e pelec'h e oan, met en em gavet on gant ur vaouez hag he deus displeget din dre belec'h mont.

BRID : Doue da ziwallo anezhi ! Gwall zigenvez eo ur seurt kornad douar evit ur vaouez da vezañ hec'h-unan-penn ennañ p'emañ an noz o tont.

KOLM : Un tamm direnket he spered e oa-hi, war a gredan, met sur a-walc'h e ouie pegen aes eo koll an hent dre aze rak hi an hini he deus

galvet ac'hanon dre ma anv, ha neuze keloù he deus goulennet diganin diwar-benn ma eontr.

BRID : (*dedennet-bras*). Ha petra he deus goulennet digant an Aotrou ?

KOLM : Er penn kentañ he deus komzet en un doare poellek. Diskouezet he deus din ma hent, ha da c'houde he deus klasket lavarout un dra bennak 'oa war he spered, met ken luziet e oa ken n'on ket bet evit kompren. Da c'houde he deus laosket ur pezh chouadenn. Spontet eo bet ar gazeg ha ret eo bet din mont kuit.

BRID : Ur pezh bras a vaouez anezhi, gant ur chal du ha blev du ? (*Pegiñ a ra da c'hwezhañ war an tan*).

KOLM : Gouzout a rit piv eo ?

BRID : Mari Gostello an hini eo, Aotrou. (*Derc'hel a ra da c'hwezhañ*).

KOLM : Ur gïaskerez-vara ?

BRID : (*Feuket bras*). N'eo ket ur glaskerez-vara anezhi... Ur verc'h Kostello an hini eo, eus ur familh kozh a Vro Gastilha. Ar re-se gwechall 'oa tud veur, tud pinvidik, noblañsoù e kêrioù Bro Spagn : hi, ar plac'h kaerañ 'oa er bed, doareoù ken seven ganti, ha daouarn gwenn-kann. E ti ar seurezed eo bet savet, ha sur a-walc'h ho peus klevet an Aotrou hoc'h eontr, Doue d'e bardono, o komz eus outi.

KOLM : Marteze 'z eus bet kaoz gantañ diwar he fenn, met n'em eus ket dalc'het soñj. Met perak en dije-eñ komzet din eus honnezh ?

BRID : Un istor an hini eo, un istor hir ha mantrus. Un deiz bennak e kontin deoc'h, marteze, ma ro deomp an Aotrou Doue ar gras da chom bev ;

met setu seurez Eileen o tont ha ne dalv ket ar boan reif deoc'h trubuilh bremañ gant kement-se. (*Sevel a ra evit skubañ an oaled*).

KOLM : Pell amzer 'zo eo aet foll ?

BRID : Pell amzer 'zo ? Dek vloaz 'zo eo bet kaset da di ar re sot hag ur souezh e oa he gwelout eno, an holl dud o tont eus holl diez brudet ar vro d'ober gweladenn dezhi, hag hi ken pinvidik ha forzh peseurt itron vras eus Breizh Veur pe eus Bro-C'hall pe eus Bro Alamagn, atav o pourmen el liorzhoù-meurogant botoù kaer en he zreid. Brav e veze an traoù ganti eno, rak, Doue da viro anezhi, atav eo bet jentil ha sioul, ha ken kaer da welout, ha klevet em eus e veze graet "an Itron" diouti gant implijidi ti ar re sot pa vezent oc'h ober goap diwar he fenn kenetrezo.

KOLM : 'N em c'houlenn a ran hag-eñ n'em eus ket heogwelet un tu bennak dija. Eus un dra bennak e kase doñj din he dremm, pe eus unan bennak, met n'on ket evit kounéal pelec'h e vijen en em gavet ganti.

BRID : (*o vont war-du ar poltred a zo euc'h ar siminal*). Deuit amañ 'ta, Aotrou, da sellout, hag e soñj din e komprenoc'h.

KOLM : (*o tostaat*). Ya, ar vaouez-se an hini eo. Met bloavezhioù 'zo eo bet livet ar poltred.

BRID : Bloavezhioù 'zo, an dra-se 'zo sur, Aotrou, ha poent bras eo ankounac'haat kement-se. Da betra 'servij terrif ar penn gant traoù e-giz-se, p'eo chomet-eñ da finveziñ gant ar boan-galon ha p'en deus dastumet glac'har a-walc'h da badout betek Deiz ar Varn.

(*Mont a ra e-tal ar prenestr. Distagañ a ra Kolm*

ar poltred, ha sellout pizh outañ e goulou ar gleuzeur).

BRID : (o sellout er maez). Setu Seurez Eileen o tont d'ar gêr. 'Maon o vont d'am gwele, rak soñjal a ra din n'ho po ket ezhomm ac'hanon bremañ ken, ha gwelloc'h 'vefe deoc'h-c'hwi ivez mont d'ho kwele eget chom da gontañ kaozioù an nozvezh-pad. Gwelloc'h e vez kousket eget merzheriañ an ene gant sorc'hennoù, soñjoù pe brederioù diwar-benn gwall reuzioù ar vuhez.

(Mont a ra kuit ha prim-ha-prim e teu seurez Eileen tre dre an nor a zigor war an diavaez).

SEUREZ EILEEN : Deut oc'h en-dro ? Aon 'm boa e vije c'hoarvezet ganeoc'h un droug bennak.

KOLM : Ur pennadig 'zo on distro.

SEUREZ EILEEN : Soñjet em boa em bije klevet trouz ar rodoù, ha ken pell hag al lenn on diskennet ; ken kaer eo an noz... Kempennet eo bet pep tra ganeoc'h ?

KOLM : Pellskridoù 'm eus kaset eus an ti-post ha chomet on da c'hortoz ar respontoù. Digwener e vo douaret e Glan-na-nee, ha warc'hoazh e teu an arched.

SEUREZ EILEEN : P'eo tarzhet an taol-arnev em eus bet keuz e vijec'h aet kuit ; sur a-walc'h oc'h bet glebiet spontus war hent ar menezioù.

KOLM : Kalzig glav 'zo kouezhet war Slieve Na Ruadh met bremañ eo tost sec'h ma dilhad.

SEUREZ EILEEN : Ur pennadig amzer on chomet da gutuilhañ bleunioù evit lakaat e kambr ho eontr, met n'am eus ket kavet kalz, ken flastret oant bet gant ar glav.

KOLM : Neuze, hoc'h eus gwelet penaos eo bet drailhet ar gwez gant ar barrad.

SEUREZ EILEEN : Echu eo an nevez-amzer. Dres e oan o soñjal pegen kemmet 'oa an traoù abaoe 'maon erru amañ, tri miz 'zo : d'ar poent-se eo war an erc'h e taole al loar he skleur.

KOLM : Be' seblant din eo tri bloaz 'zo hoc'h eus kaset din ar pellskrud, ken brav omp deut boas da vevañ an eil e-kichen egile.

SEUREZ EILEEN : (o cheñch penn d'ar gaoz). Petra 'zo aze ganeoc'h en ho torn ?

KOLM : An daolenn a oa euc'h ar siminal. (O tiskouez ar poltred dezhi). Ganti on en em gavet en noz-mañ, e bered Glan-na-nee.

SEUREZ EILEEN : Ha perak oc'h aet war an tu-se ha na oa ket tamm ebet hoc'h hent ?

KOLM : O tistreiñ d'ar gêr on bet kollet, ha gant ar vaouez-mañ on bet lakaet war an hent mat. Gouzout a rit un dra bennak diwar he fenn ?

SEUREZ EILEEN : Alies a-walc'h 'm eus klevet komz eus outi, aliesoc'h egedoc'h marteze.

KOLM : Lavaret he deus Brid din e oa bet pell amzer e ti ar re sot'hag e anaveze mat ma eontr.

SEUREZ EILEEN : C'hoant en doa bet da zimeziñ ganti daoust dezhi bezañ eus ur familh dister, met pa oa prest pep tra he deus-hi nac'het peogwir ne grede ket e Doue.

KOLM : Ha goude-se neuze eo aet sot ?

SEUREZ EILEEN : Ya. Hag en em sparlet en deus ho eontr en e di. Lavaret en deus din e oa ugent vloaz pe dost eo c'hoarvezet kement-se. Morse n'en doa rannet ger diwar-benn-se da

zen all ebet. Ne soñj ket din en dije lavaret
din ma ne vije ket bet ennañ kasoni ouzh ar
religion hag ouzh an dilhad a zo warnon.

KOLM : C'hwi soñj deoc'h eo d'ho lakaat da brederiañ
en deus kontet kement-se ? Ha koulskoude e
sellit outi evel ur skouer vat evidoc'h, emi-
chañs.

SEUREZ EILEEN : Mat he deus graet. N'eus gwir gris-
tenez ebet hag he dije graet e mod all.

KOLM : M'ho pije gwelet anezhi en noz-mañ, o you-
c'hal hag o skuermal en taouarc'heg...

SEUREZ EILEEN : Ne fell ket din he gwelout... E-pad
tri miz am eus gwelet ho eontr o c'houzañv,
hag hiziv em eus gwelet anezhañ o vervel.
A-walc'h evel-se.

KOLM : N'eo ket sur e vije a-walc'h peogwir n'oc'h
ket deut a-benn da gompren eo bet ar vaouez-
se kriz gantañ ha ganti hec'h-unan p'he deus
nac'het sentiñ ouzh he c'halon.

SEUREZ EILEEN : *(O reiñ an daolenn en-dro dezhañ)*.
N'omp ket evit komz diwar-benn kement-se.
N'hon eus ket an hevelep doare da gompren an
traoù. Kalz eo kemmet abaoe m'eo bet livet
an daolenn ?

KOLM : Nebeutoc'h egetañ. *(Adlakaat a ra an daolenn
en he flas)*. Gantañ 'oa ar gwir p'en doa
c'hoant da reiñ kentel deoc'h gant an istor-
se. D'ar mare-se e oant o-daou an hevelep
oad ha ni bremañ, hag hiziv eo an eil foll
hag egile marv gant ar glac'har. *†Skeiñ a
ra unan bennak war an nor)*. Deuit tre !

*(Dont a ra Brid tre, tamolodet en ur chal, evel
unan a zo mall bras warni, ur pellskrud ganti en he
dorn)*.

BRID : *(O reiñ ar pellskrud da seurez Eileen)*. Emañ
an dra-se o paouez erruout evidoc'h, seurez
Eileen. E kêr eo bet resevet kerkent hag aet
kuit an Aotrou Kolm ha roet eo bet d'un den
kozh o tont war an tu-mañ gant e azen hag e
garrig.

*(En tu kleiz eus ar sal emañ seurez Eilenn, kemer
a ra ar pellskrud, ha mont war an tu dehou da lenn ;
sin he deus graet Brid da Gorm da dostaat.)*

BRID : *(A vouezh izel)*. Laret eo bet din gant an
hini kozh en doa gwelet Mari Gostello o tont
a-red a-dreuz d'ar menezioù war-du amañ ;
neuze, arabat d'an Aotrou bezañ spontet o
klevout anezhi o kanañ hag o c'hoarzhin, pe
marteze o luskel youc'hadennoù e-kreiz an
noz teñval.

KOLM : Hag un dra bennak a c'heller ober evit he
sikour ?

BRID : Tra ebet, Aotrou. Gwelloc'h lezel anezhi e
peoc'h.

(Mont a ra war-du an nor).

SEUREZ EILEEN : *(O treiñ war he zu, a vouezh izel)*.
Hag eñ e vo kavet unan bennak da gas ac'hanon
e kêr warc'hoazh vintin ? Ret eo din mont da
Zulenn gant an tren kentañ, diouzh ar beure.

BRID : Eveljust e vo tu da gavout unan bennak, Seurez
Eileen. Ha da bet eur e vo ret mont da glask
ac'hanoc'h en-dro ?

SEUREZ EILEEN : Ne zeuin ket en-dro.

BRID : Doue d'ho skoazello, Seurez Eileen, Doue d'ho
miro e yec'hed hag en evurusted, Doue ra
blaenaio dirazoc'h an hent da vont d'ho ti.
(O treiñ war-du an nor). Gwall zigenvez en
em gavimp pa voc'h aet kuit ; un tamm buhez

hoc'h eus degaset en ti-mañ, a zo bet ken trist ha ken teñval a-hed bloavezhioù ha bloavezhioù hag a vo teñval adarre goude an noz-vezh-mañ. (*Mont a ra er maez dre an tu kleiz*).

KOLM : (*Fromet-bras e vouezh*). Petra 'maon o paouez klevout ? Warc'hoazh ez it kuit ?

SEUREZ EILEEN : Unan bennak en deus kaset d'ar vamm superioez ar c'heloù e oa marv ho eontr ha bet em eus diganti ur pellskrud o lavarout n'eus ket ganti a-walc'h a glañvdiourezed hag he deus ezhomm ac'hanon ken abred ha warc'hoazh da ober ul labour all.

KOLM : Ha n'oc'h ket evit chom ur pennadig c'hoazh ?

SEUREZ EILEEN : Aon 'm eus ne vin ket... (*O sellout ouzh ar bandulenn*). Hepdale e vo ret din mont da brientañ ma malizennoù.

KOLM : Pellskrivit d'ar vamm superioez n'oc'h ket evit mont kuit a-raok an obidoù... E-giz-se e chomoc'h amañ tri devezh muioc'h c'hoazh.

SEUREZ EILEEN : N'hellan ket... Na dalvez ket ar boan tabutal diwar-benn-se.

KOLM : Tabutal a rin keit ha na vin ket deut a-benn da lakaat ac'hanoc'h da zibab etre sentiñ ouzh lezenn an douar, pe neuze bevañ en-dro istor ma eontr hag ar vaouez aet foll.

SEUREZ EILEEN : (*Taer he mouezh*). Ma lavarit din ar pezh a zo war ho spered, ha gwelout a ran hoc'h eus c'hoant d'hel lavarout, neuze e vo ret din mont kuit eus an ti ha ne gomzin ket deoc'h ken. Setu aze ar pezh ho po gounezet.

KOLM : (*Sirius, o serriñ an nor gant an alc'houez*). Na yeoc'h ket kuit a-raok n'ho pije klevet ar pezh 'zo war va spered. Goude-se, ma 'z

oc'h gwan a-walc'h evit dilezel ho lod eus ar pezh a zo ar gwellañ er vuhez, neuze e c'helloc'h mont 'lec'h ho po c'hoant.

SEUREZ EILEEN : (*Klemmus ton he mouezh*). N'em bije ket c'hoant e vefe moc'het ganeoc'h an eurvezhioù diwezhañ hon eus da dremen a-gevret.

KOLM : Marteze ne vint ket ar re ziwedhañ.

SEUREZ EILEEN : (*O vont da enaouiñ ar c'houlouenn goar hag o kemer al lienenn gañv*). Me ho ped, digorit an nor ha lezit ac'hanon da vont kuit. Mont a ran da gousket. Ur fazi am eus graet o lezel ac'hanoc'h da gomz ouzhin evel-se, met warc'hoazh e tistroin d'am gwir vuhez ; hag e c'houlennin bezañ pardonet.

KOLM : Ha soñjal a ra deoc'h e tisoñjoc'h an ti-mañ hag ar pezh a zo bet lavaret !

SEUREZ EILEEN : Ne vo den evurus ma ne ra youl Doue. Setu ar pezh a ran.

(*Eus an diavaez e vez klevet ur c'hoarzhadenn foll o tarzhañ, da c'houde difronkadennoù hag un tamm kanaouenn. Kerkent goude e tigor an nor en un taol ha tre e teu Mari Gostello. Dallet ha ma 'z eo gant ar goulou, ez a war an tu kleiz hep gwelout na Kolm na seurez Eileen. Mont a ra war-du an daol-sekretour er c'horn, gwelout a ra ez eus un diretenn digor hag en ul lamm emañ-hi o furchata e-barzh. Kavout a ra ur c'houfrig-bravigoù, tennañ a ra diouti div walenn hag a lak war he bizied, o treiñ ar mein da lugerniñ er goulou. Kavout a ra ur pakad dilhad gwenn, ha dioutañ e tenn ur sae seiz hag ettiskouez emañ o vont d'he gwiskañ. A-raok hen ober, e sell buan en-dro dezhi hag e wel Seurez Eileen ha Kolm. Lezel a ra ar sae da gouezhañ en ur leuskel ur youc'hadenn,*

dastum a ra he chal ha diflipañ 'ra war-du an nor,
met a-sav e chom trumm ha treiñ war o zu.

Mari : Met seurez eo honnezh ? Petra 'zo peg ennoc'h
o tont e-giz-se da spiañ warnomp pa ne reomp
netra fall ebet. Ha peseurt gwir o deus 'ta
ar seurezed da zont da lakaat o fri e aferioù
ar re all ? (Anavezout a ra Kolm). Met hennezh
am eus gwelet dija, Doue ra warezo anezhañ,
kollet 'oa bet e hent gantañ. (Mont a ra war
e du. Hep ober a-ratozh, eo tostaet Seurez
Eileen ouzh Kolm. Sellout a ra Mari ouzh an
eil hag egile, ur mousc'hoarzh iskis war he
dremm). Ur vaouez kaer a zo ac'hanoc'h, me
'lavar deoc'h. Met na daolit ket evezh ouzh
ar pezh a lavaront. (Lakaat a ra he dorn war
vrec'h Seurez Eileen en un doare aspedus).
N'oc'h ket chalet gant pezh a lavaront, Seurez,
lavarit din, n'oc'h ket chalet ?

SEUREZ EILEEN : N'on ket chalet gant pezh a lavar
piv ?

MARI : (O tigeriñ bras he divrec'h, hag o stardañ
anezho en-dro warni hec'h-unan, oc'h ober un
hanter-dro hag o leuskel ur c'hoarzhadenn
skrijus). "N'on ket chalet gant pezh a lavar
piv ?" a lavar-hi. "N'on ket chalet gant pezh
a lavar piv ?" Pell amzer 'zo em eus kuitaet
ar skol, Seurez, ha koulskoude e anavezan mat
an holl draoù-se. Ha gouzout a ran mat, ale,
na daolit ket kalz evezh ouzh pezh a gont ar
veleien, pe an eskibien, nag ouzh pezh a vez
kontet gant Aeled Doue rak nebeut a dra a
ouzont diwar-benn ar merc'hed ha seizh glac'har
ar bed. (Enkrezet he mouezh, e stou he fenn
hag e wel al lienenn gant e dorn Seurez Eileen).
Piv a zo marv 'ta, Aotrou, m'eo gwir eo
kement-se ur sin a varv ?

KOLM : Ma eontr, Kolm Sweeny, a zo marv.

MARI : (Dichal he mouezh). Ha neuze, ra chomo da re-
poz e peoc'h, petra 'vern din bremañ ? Aon
am eus bet e vije bet ma bugale vihan. (Sevel
a ra he sell war-du Kolm hag e leñv). Rak ma
n'on bet morse dimezet, ha ma n'em eus ket bet
a vugale, e vezan atav o soñjal e tleont bezañ
bev, zoken ma n'eo ket me a zo bet mamm dezho.
(Sevel a ra he mouezh kreñvoc'h gant ur youc'ha-
denn glemmus). Evit gwir e welan anezho dirak
ma daoulagad pa teu ma spered da strafuilhañ
ha p'en em roan da gousket. Pemp a zo anezho,
pemp bugel hag o doa c'hoant bevañ, Doue da
ziwallo anezho, m'o dije ar veleien hag ar
seurezed roet din an aotre. (Merzeriet gant
ar boan). Fur e vezont atav, Aotrou, naet e
vezont, dilhad brav 'zo warno ha bizhier bihan
da vont da vale a zo ganto en o daouarn. Met
ne blijfe ket din e krogfent da vervel p'emaon
me bev, peogwir n'on ket evel doc'h-c'hwi...
(Kuzhat a ra he dremm en he daouarn)... ha
traoù iskis an hini a welan pa 'vez loar gann.
(Stouiñ a ra he fenn ha tarzhañ da zifronkañ).

SEUREZ EILEEN : Arabat teurel evezh ouzh an traoù-se,
Mari, n'eus netra amañ da spontañ ac'hanoc'h.

MARI : (O terc'hel da zifronkañ). O, aet eo ma fenn
gant avel an noz, ha gwall zigenvez e vezan
pa yan war hentoù ar palud, e-touez ar c'honi-
kled a vez o redek hag int gleb-par-teil gant
ar glizh. (Sellout a ra ouzh Seurez Eileen gant
un aer mantret ha gwelout a ra ar groaz vihan
a-ispilh en he c'herc'henn. Kemer a ra ar groaz
en he dorn). Ha reiñ a rafec'h din ho kroaz
vihan, seurez, rak kollet 'm eus ma hini hag
unan a garfen kaout da zerc'hel em dorn pa
choman azezet. (Reiñ a ra Seurez Eileen ar

groaz dezhi). Ra vo rentet deoc'h gant an Doue holl c'haloudek, seurez, ha plijet dezhañ reiñ deoc'h bugale kaer a-raok mervel. (*Reiñ a ra ar gwalinier dezhi*). Ra vo benniget gantañ ar gwalinier-mañ, ha pa vezint war ho pizied ra vo benniget ho torn gantañ ivez, ha ra vo e vennozh warnoc'h, ha c'hwi oc'h aozañ mailhurennoù, pa vo deut hoc'h amzer. (*Sellout a ra ouzh ar groaz en he dorn*). Vad a raio din sellout outi, peoc'h a vo ennon bremañ p'am bo honnezh em dorn en nozvezhioù ma vo izel al loar, pa vezo koulmoellennoù gwenn o tremen euc'h ar paludoù, pa vo ma bugale vihan din o fringal hag o youc'hal an eil d'egile hag o c'hoari en noz-du, pa n'eus mui kristen ebet war zihun, nemedon-me, ma unan-penn, ha pa vez klevet ar gwazi gwenn daou pe dri gilometr ac'han o kas o safar dreist ar paludoù. (*Mont a ra war-du an nor*). 'M eus aon eo dav din mont bremañ, rak hir eo ma hent hag ur gompagnunez e vo din ar groaz em dorn pa vin o vont gant gwenodenn ar c'hoad. Doue d'ho miro en evurusted, c'hwi ho taou. Kalz tud er bed bras a ya da zimeziñ, met ni hon daou a oa re ziwzhat emichañs, diwallit na c'hoarvezfe hefivel ganeoc'h. Arabat deoc'h ankounac'haat ar pezh a lavaran deoc'h, na rit van ebet ouzh komzoù ar veleien, an eskibien pe Aeled Doue, rak lavarout a ran deoc'h c'hoazh n'ouzont netra diwar-benn ar merc'hed ha diwar-benn seizh glac'har ar bed. (*Mont a ra kuit*).

(*Mont a ra Seurez Eileen da lakaat en-dro an dilhad gwenn hag un nebeut traoù all en diretenn*).

KOLM : Emaoc'h o paouez klevout ur vouezh all o komz deoc'h. A-benn un nebeut bloavezhioù e voc'h ivez ken kozh hag hi. Nozvezhioù all a vo, ken bamus hag homañ, ha laboused o kanañ war



Ar pezh a chome, e miz Eost 1978, eus straed St Malo, e Roazhon. Eno emeur bremañ o sevel ur "c'hendi steredennhenvel" !!

ar brug met netra ne fromo ac'hanoc'h ; evel
ma eontr en tu all d'an trepas, ne voc'h fro-
met gant netra. (*Mont a ra daveti*). N'on ket
ur plac'h ha n'on tamm ebet evit kompren ar
pezh a zo en ho kalon, ha koulskoude e ouzon
mat ez oc'h kaset war-du ar pezh anzo tra ar
merc'hed. Gouzout a rit ez eus muioc'h a san-
telezh en nerzh a gas ac'hanoc'h da gemer perzh
e poan hag e karantez ar bed eget er promesaoù
hoc'h eus graet en ho kouent. (*En he sav hemañ-
hi dirazañ, difiñv ; komz a ra dezhi gant ur
vouezh teneroc'h*). Ken kaer eo ar mintin hiziv,
n'oc'h ket gouest da lavarout gevier. Gouzout
a rit ez oc'h leun gant ar c'hoant bevañ en
deus kemmet ar bed. Perak chom da randoniñ
gant sorc'henoù an dud santel pa 'z eo ho
puhez-c'hwi santeloc'h eget o hini. En em
zistreiñ a ra an dud diouzh ar bed pa n'eus
nerzh ebet enno ; met c'hwi, nerzh ha youl a
zo ennoc'h... Azpediñ a ran ac'hanoc'h ; lakait
anezho da dalvezout...

SEUREZ EILEEN : N'ouzon ket petra ober... Poan a rit
din, ha koulskoude...

KOLM : Setu, krog eo al laboused gant o c'han. Pa
savo an heol euc'h ar grec'henn, e c'houlennin
diganeoc'h bezañ gwreg din... N'hellit ket
nac'h. N'hell ket ar gwez nac'h dont da
vezañ glas ha teurel frond pa zeu miz Mae,
n'hell ket al laboused nac'h kanañ p'emañ an
deiz o tarzhañ... Setu an alc'hweder hag al
laouenanig. Un hanter eur a roan deoc'h... Ne
douchin ket ac'hanoc'h... Ne glaskin ket
pouezañ war ho spered... Didalvez a-grenn eo...
Ar vuhez an hini a gendrec'ho ac'hanoc'h. An
anal hag en deus krouet ar c'hoad ha degaset
ennañ da ganañ nozvezhioù leun a dan a ra ivez

diouzhoc'h un notenn eus sonerezh kaer ar vuhez. Setu rouzeganig an haleg ; ur c'hardeur ho peus c'hoazh. It da wiskañ ar sae-mañ. Ne fell ket din bezañ dizoujañs ouzh an traoù sakr.

(Kemer a ra Seurez Eileen ar sae wer hag hep ur sell outañ, ez a kuit. Sellout a ra-eñ war-du an diavaez e-pad ur pennadig amzer ha goude, adlakaat a ra paperioù e tiretenn an daol-sekretour. Mont a ra en-dro e-kichen ar prenestr. Ur pennadig goude, e teu tre Seurez Eileen, dre an nor a-dreñv dezhañ, gwisket ganti ar sae wer, izel warni digor ar gouzoug. Erruout a ra e-tal ar prenestr d'ar mare ma teu tre er gambr, a-dreuz ar gwer, goulou ruz ar mintin).

SEUREZ EILEEN : (A vouezh izel). Kolm, deut on deoc'h en-dro.

KOLM : (O treiñ daveti). Kaer meurbet ez oc'h ha ken kaer all eo ho tibab. Gant kaerder ho kalon an hini eo oc'h bet dieubet. Dousoc'h eo ho tieubidigezh eget hini an dud a gav hent ar frankiz dre poell ar spered. N'oc'h ket evit lavarout din perak oc'h kemmet. Gwelet e vez dre ar sked a zeu diouzhoc'h. Evel ma vez ganet ar valafenn en ur vuhez nevez a frondoù, a livioù hag a nijadennoù, evel-se oc'h ganet c'hwi d'ur vuhez nevez a garantez hag a gaerder... Klevit geiz al laboused er gwez. Kanaouenn-lid hon eured an hini eo. Ur bed hep karantez ebet ne vefe nemet ur berniad traezh divalav, ha ken didalvoud all eo un ene hep karantez... Lavar din un dra bennak. C'hoant 'm eus da glevout ac'hanout ; adalek hiziv e vo ur son nevez gant da vouezh.

SEUREZ EILEEN : Ma gouel-seurez am eus lezet er gambr lec'h m'emañ ho eontr o repoz... Be' seblant din emañ o vevañ en un huñvre, ha kaset on

war-raok daoust din ma-unan. v6pi am eus e vin pardonet gant Doue. N'on ket evit ober a-hend-all.

KOLM : Pet a dud o deus goulennet e vefe pardonet dezho ar momed evurusañ eus o buhez ! Bezomp furoc'h. (Kemer a ra unan eus ar gwalinier). Setu ar walenn en deus bet ma eontr ha lodenn-boan d'e vuhez. Ro din da zorn. Me, dre ma nerzh gwaz, dre ma c'harantez, em eus gounezet ac'hanout, te, an ene re gredik, servijerez ar sent. Diouzh kenson hon diemglev e tarzho ur sonadeg nevez. A-benn ar fin e vezimp heñvel an eil ouzh egile, kozh hag eeun e teuimp da vezañ. Doue hon eus enkorfet, deut omp da vezañ ul lodenn eus ar bed. A-walc'h eo. (Kemer a ra he dorn). En anv an Nevez-Hañv, hag an Heol hag ar Vuhez a-bezh, da wreg e kemeran ac'hanout. (Lakaat a ra dezhi ar walenn war he biz).

DIWEZH

Yann-Eozen JARL

TARZH AN NOZ

Skinadeg ruz an heol a wad war bronn ar roz...
Gwagennoù skeud ar reter, boull ha skañv, a c'hwez
Ar c'hoarzh a drid dirak reverzhiglas an noz.

Da reiñ gliz d'ar geot a weñvas ar wrez
E widil lano gwenn latar ar pradoù
A-hed ar stradoù hir a dorr ar menez.

Dasson lent kloc'h an noz a luskell deil ar c'hoadoù
Hag a dreuz, kreñv ha drant, kerc'heñv skuizhet an dud,
Tra ma vann, e glezeier-meur, ged taer an tourioù.

An evn a c'heiz war-lez e glud,
Dindan ar peoc'h a sil an neñvoù
Abrantoù aour ar stered mut.

Kan gwent an noz,
El lugern seiz,
Stank a strink bennozh

D'an den a dorras striv an deiz ;
'Vit neb a stenn e gorf d'an dont,
Oc'h armañ feiz an trec'h 'n e greiz,

Gant c'hoarzh ha luc'h emañ o vont
An nerzh e kalon taer an dir,
Dre'r glizh a demz ar spi a spont.

An noz 'zo hir
D'ar selloù teñval,
Klemmus o bir

Gant glac'har du ha dall.
D'an tal a wash rec'h foll
An hiraezh lemm ha fall,

An eur a stroll
Bleun ruz e zaeroù,
En noz a roll

Ra sailho ennomp, du e vannoù,
Tarzh hon Noz,
Tarzh teñval, duoc'h-duañ gant an deizoù,

Ha trist ha c'houero e wentpoz...
Hep son, hep glizh, hep frond, hep sked,
Hep goanag splann war froud hor mallozh,

Gant trid hor c'halon douget,
Ra lammo balc'h hor brec'h,
Dre lug an aerva kalet.

Ma varv hor c'horf er bec'h,
N'eus forzh, ur c'houlz, re all
A verzo luc'h an trec'h,

War dal hor Feiz hep brall,
Ha tarzh an noz hep nec'h,
O kanañ 'vel gwechall.

(embannet evit ar wech kentañ e-
barzh GWALARN, niv. 3, diskar-amzer
1925)

Olier ar MOGN

UN ISTOR SIMPL

"Bec'h de'i !" emezañ. 'Oa o vont da aloubiñ "Servij an Estrenien". Ur c'hant bennak e oant. Mennet start ma oant n'hellent ket c'hwitañ war o zaol. Kavet ur c'harr da gement harzer-labour a oa deut a-benn da ziblouzañ araok eizh eur vintin, e loc'has ar c'hirri.

En em gavet e oa gant teir flac'h en un daoujav. 'Oueze ket re petra lavaret. C'hoant kaozeal n'en devoa ket. Abaoe eizhteiz edo o labourat evit an harz-labour. Skuizhus eo un harz-labour. Kement-se a oueze bremañ. Ar wech kentañ e oa dezhañ bezañ harzer-labour. Desket kalz, desket buan en devoa en ur ober ur sizhunvezh. Deut ingal d'an emvodoù meur, d'an ajeoù ... Komz, kaozeal, prezeg, preg, safariñ; kaozioù goullo tout. Petra' soñj ar boblañs eus ar studierien ? Feneanted vreïn, lezireien daonet.

"Bec'h dehi ! D'ar prefeti ! Ra vo krouget ar prefed !", setu ar pezh' vije atav prest da youal. Sklaer e oa. Sklaer a-walc'h evitañ d'an nebeutañ. Otonom ? Ma talv otonom kement ha "den prest d'en em gannañ ma'z eo talvoudus", otonom e oa.

Stourm - Stourm - Stourm. Gerioù all ar yezh a oa bet ankounac'haet. Ne oa nemet ur ger all en devoa dalc'het soñj anezhañ. Mes, ne grede ket e zistagañ ; trec'h.

Pellaat a rae dioutañ a-feur ma tostae outañ.

Sech'ed en deveze. Meurvoriadoù a vuhez a vije aet gantañ. Mervel ? Petra c'helle sinifiañ ar ger-se pa ne veve ket c'hoazh ?

Magañ spi - Diaesoc'h-diaes.

Diskrog labour. Bec'h dehi ! Trec'h e vezimp pe ... neuze ... pe ...

Piv' zo hegredik a-walc'h evit krediñ e c'hellfe bezañ lakaet diaes hollveli o stad gant un dornadig korfoù yaouank ? Furlukined ! Krak-dispac' herien !.

Kerzhet a-gevret gant 8.000 den e straedoù ar gêrbenn. Youet e walc'h. Prefeti-Triliv-Glas-Gwenn-Ruz.

Ruz-ruzañ e soñjoù war havezioù un diarvar yen. Faezh.

Youal - Youc'hal - Yudal.

C'hoarzhit nondedie ! Hag e kav deoc'h ez eo evel-se e vezo lakaet ar prefed da blegañ ? Feiz !

Ur vindrailherez gantañ en e benn. Sell ! An hezwaz du-hont. Toullet e gof dezhañ. Gourvezet war an ter digor-bras e c'henou. Poz ebet ken. Echu

Lazhañ. Distrujañ. Prest e oa d'hen ober. Ha trist eo kement-se, tудоù ? Lazhañ ar geizh aet da fliked pezegwir ne ouezent ket petra ober en-hend-all. Bo, en dije lavaret deoc'h, evel-se emañ ar vuhez "drebiñ pe bezañ drebet". Ha gwazh-a-se evit mevelien o stad.

"Servij an Estrenien". Un ti bihan na vez ket taolet evezh outañ. Hag i e-barzh. Ar studierien o c'hoarziñ. Ar wech kentañ mont "ken pell"-se evit al lod brasañ anezho. Den ne oar penaos e echuo.

Ur studier : "Ma, evit delc'her al lec'h omp deuet amañ. Keit ha ma ne vezo ket bet pellgomzet d'e veurded an Aotrou Prefed ha lavaret dezhañ e c'houlennomp groñs ne vefe ket skarzhet' maez ar studierien estren, e chomimp aze".

"Mat" eme ur polis bennak "Graet e vezo, mes da gentañ kit e-maez an ti-mañ. N'ho peus netra d'ober, aze. Ha gouzout a rit emac'h amañ en un ti-polis ?".

"Pellgomzit da gentañ hag ez imp kuit goustad hep na vije tamm reuz ebet. Mes, goulennit digant ho kwarded chom hep skeiñ ganeomp ...".

"Mat, graet e vezo e giz-se...".

Hag ar studierien da ziskenn gant ar viñs. Goustad. Goustad. Ne c'hoarzhont ket ken. Kirri-boutin leun a warded-vobil a zo erruet. C'hoant skeiñ a zo ganto. Hag int-i er savadur. Daou pe dri c'homiser a lavar dezho chom hep skeiñ.

Ar warded, int, a zo o klask un digarez evit diskouez na pegen ampart ez int. Dam' betra bezañ gourdonet mat ma ne servij da netra ?

Hag i da gunujenniñ ar studierien. "Studierien vreïn !. Piv a bae o studioù deoc'h ? Gwelet e vez n'ho peus seurt ebet d'ober. Ale, kit buan d'ar gêr, bugaligoù ..."

Hag i, gouroned an Urzh, da gontañ o zaolioù er manifestadegoù labourerien. "N'edoc'h ket aze, aze ne oamp ket bet ken jentil. Komprenet o devoa buan ..".

Hag o devoa. Dek den bet kaset d'an ospital.

Dilavar e chom ar studierien. Mall warno bezañ diank.

Mes, en traoñ, ez eus daou bolis, o c'houlenn ar c'hartennoù-anv !. Ha daou zen all en o c'hichen o skrivañ an anvioù hag ar chomlec'hioù war garnedoù bihan !.

N'o deus ket ar gwir d'hen ober. Met gwelloc'h eo sentiñ. 'Vo ket tu da vont er maez a-hend-all ha' vefe ket brav dezho.

Ar boliserien : "Ale, sachit ho skasoù pe emacomp o vont da fuloriñ". Lod eus ar studierien a zo war ar straed o c'hedal ar re a zo c'hoazh en ti.

Echu an abadenn. Godisus ar fliked.

Ne vezo ket ankounac'haet seurt daoulagadoù leun a gasoni. Biken ...

--- ---

Paotr 1 : "Ur banne dour-tan a yelo ganez ?"

Paotr 2 : "Ya, sur !".

Paotr 1 : "Mat. Daou vanne hini-kreñv, mar plij !"

En davarn e oant en em gavet dres goude koan. Skuizh-divi. Goude abadenn ti an Estrenien e oant aet da greñvaat ar strolladoù diwall-ec'hwel. Dre ar skol-veur a-bezh e veze kavet kentelioù !! Digalonekaüs. Ha bepred an hevelep re. Hemañ kaoc'hek e veg leun a zemokratiachoù. Houmañ keflusket gant "nerzh faskour paotred ar birvilh" !. Kastrihez a oa roet dezho bep tro, bep tro.

Vad e ra ul lommig dour-tan.

Paotr 2 : "Petra vezo graet emberr ?".

Paotr 1 : "Un tamm fest a zo en hall bras, er skol-veur. Bier a zo da evañ. Gwelet' m eus daou baotr gitarioù tredan ganto, ivez. Ne hañvalent ket bezañ gwall varrek mes, ne vern. Me' blij din trouz ar gitarioù tredan ...

Paotr 2 : Charinkañ ur fistolenn a rafen a-walc'h goude ma ne wellao ket d'am stad ... Ur vanifestadeg a vezo warc'hoazh... An deirvet ... Dre belec'h e tremen ? N'ouzout ket ? ... ne ran ket foutre kaer ... Ne servij da netra ... ken ... Ur bourmenadenn e kreizkêr... Mont a rin' mestra... Ha graet' peus ar giton ?"

Paotr 1 : "Ya"

Paotr 2 : "Ha petra' peus lakaet warnañ ?"

Paotr 1 : "Ul lugan droch, ul lugan petra..."
"Ur banne all a baki ?".

Paotr 2 : "Grin ! Mes deus' ta ganen d'ober un tañva d'am guin ! Chom ket kalz ganen, poent dit dont !.

Paotr 1 : "Ma, deomp !"

GOURFENNSKRID.

ABROGATION DE LA CIRCULAIRE BONNET !

DISKENNIT DIMP UR BANNE GWIN DIOUZHTU !.

Dejanadeg. Aet omp skuizh gant o luganioù toull. E galleg. Ha toull.

Ha ma vijemp prest d'en em gannañ ?

Digiriek.

Daoust ha n'eo ket ar ribitailhad krak-dispac'herien strizhet a zo digiriek ? Ha petra hon eus d'ober gant ar pezh a soñj bourc'hizien kreizker ? Emskiantekaat ar yoc'hoù ? Kaozioù goulllo !

Bout poellek a-walc'h evit mont betek penn ar pezh ne greder ket lavaret.

Netra muioc'h.

1añ a viz Mae 1979

Notennoù :

Hezwaz = Archer

Strollad diwall-ec'hwel = Strollad diwall-harz-labour
Reiñ kastrihez da unan bennak = Kas unnan bennak da sotal

Kaoc'hek = orbidus

